

CHANSON NEVEZ VAR SUJET EUR MARTOLOT AG E VESTRES

Var don : *Ma Petite Jeannette*

Tud yaouanc totoit da glevet
Eur son so neve compostet
A so savet vit ar bla,
Entre daou den yaouanc,
Ag a deuio daou gant joa,
A beb eill da barlant.

(bis)

Ar Martolod, outan e unan

Me a zo eur martolod yaouanc
Allas ne m'eus na tad na mam
Zo ruillet a diruillet,
Bars an creis ar mor don,
Allies ar boan speret
A ra din poan galon.

(bis)

A c'hoas ar boan se ne d'he netra
Oh, en qever an ini m'o c'hoas,
D'eus abars eur plac'h yaouanc,
Siouas m'eus re garet,
Rag erva va zantimant,
Vijemp quet separet.

(bis)

Mes eur c'helou o m'eus recevet
Ag a ra din cals a boan speret
Laret so din abers mad,
Penos n'am c'harie quet.
Ag e re diouin me goab,
A c'hoas ne oelent quet.

(bis)

Mar d'he gouir ar peç a m'eus clevet
Var c'halon baour a vo glac'haret.
Mes gent donet da gredi,
Eur c'helou quet barbar,
Vo red din en approuvri,
Arog demer glac'har.

(bis)

Me c'houlenno eur bermision
Ag a c'hayo sur dre drahison,
Me a eruo er vro
Ep bea bet goelet
A neuse me a velo,
Ag en vint trahisset.

(bis)

Cetu me eru ebars er vro,
Oh daoust a peno e vo an dro,
Goelet ran eun den yaouanc,
O tiserei d'eus e zi,
Breman me avel patant,
E m'ho divar va fri.

(bis)

Mes n'eus forç red a ve din monet,
A ganti me a renquo prezeg,
D'eus a lavaro va mestres,
Me sur e resproto,
Gant cals a hardiegues,
Demeus o freposiou.

(bis)

Ar Martolod, d'oc'h antren e ti e vestres.

Debonjour a joa va douç Jannet
Pell bras so ne m'eus quet o coelet
Cleven qen deus o kelou
Var bont va batimant,
Velen qen o lizerou
Me a m'oa n'hehamant,

(bis)

Ar Plac'h

Estonet bras on deus o coelet
A cals muioc'h c'hoas d'eus o clevet
Ma ne scifiec'h quet d'ec'h,
C'houi ne scifiec'h quet din,
Ag eveldoc'h me moa lerc'h,
Da gaout cals a sourçi.

(bis)

Ar Martolod

Ya guir mad e ar peç a laret,
Mes credi a ran p'eut vra zromplet,
Clevet meus bet abeurs mad,
Var glas a liserou.
Penos rec'h diouzin goab
Pa oan pell deus ar vro.

(bis)

Ar Plac'h

Oh, na mar gue dre foss qeloyou
P'eut recevet var o lizerou
Oc'h deut abeteg aman,
Evit va approuvi,
Chom tranquil dec'h a laran
Deut quen d'am frecanti.

(bis)

Ar Martolod

Cals a raison a peut va mestres
Rag me n'ho carin quen sur james
N'he quet clevet gant tud all,
E bet din er reson,
Rac me aboe an deis all,
Oeie oa trahison.

(bis)

Ar Plac'h

Oh, trahison sur me na ren quet
Mes dec'hui me na zemein-quet
Rag goelet a ran certen,
Dirag va daoulagat,
Penos peut deus o touguen,
Eur marc'h ag a vale mad.

(bis)

Ar Martolod

Var gezec me na valean quet
Var ar plench me ne lavaran quet
Mes c'houi greg deur martolod,
Ne vefet birviquen.
Pe otramat e de lod,
De meus ar chench souben.

(bis)

Ar Plac'h

Nan martolod me ne gemerint quet,
Rag aon na vem-me ampoesonnet,
Santout ran gant o tillat,
Me gred c'hoes ar godron,
Va c'halon ne all quet pad,
N'ho quever ma mignon.

(bis)

Ar Martolod

Penos ta plac'h yaouanc dilicat
Ches ar godron a so eur c'hoes vad
Dour godron a ve roet,
Da merc'het eveldoc'h.
Evit espern o yec'het,
Ag e vent cals crev'oc'h.

(bis)



Ar Plac'h

Petra livirit din martolod
C'houi am c'hemer evit hea sod,
Dour godron ve quet roet,
Met dand dud potriner,
A me n'hon quet ententet,
Dalhit o lo louzeier.

(bis)

Ar Martolod

Oh, Jeannedic, potriner oc'h sur
D'eus a ze d'ech me en assur,
Var e pisach e merquet.
Liou a pevar blanquen,
O taoulagad coarennet,
O taouarn so melen.

(bis)

Ar Plac'h

Lavarin din evel ma qerfet
Martolod me ne gemerin quet,
Rag cals ac'hanoç'h a ve
Sotissou en o fenn,
A zong d'he ve o gragues,
O lampat er vouillen.

(bis)

Ar Martolod

O nebon bea zo cals anhe,
Ag a blichefe d'he ober se,
Mes c'houi plac'h yaouanc charmant
Gant an oll admiret
C'houi choaso ep nehamant,
An hini a garfet.

(bis)

Ar Plac'h

Ya me a choaso eur micherour,
A ne ieio quet a us dan dour
A ne m'ho nep dehamant,
Quen neubeut poan speret,
Pa deuio bariou tourmant,
Gant aon na ve beuet.

(bis)

Ar Martolod

Ya neuse n'eur gafel evurus,
Mes un tamic vefet morc'hedus
A mar labour bar er ger,
C'houi chomo tost dean,
Casi vel eur gos comer,
Da zellec diontan.

(bis)

Ar Plac'h, droug enni

Arça martolod clevit eta,
A n'he quet poënt dec'h echui c'hoa
It da glasc o patimant,
So en creis ar mor bras.
Rag erve va zantimant,
Me n'he d'apfoc'h quet c'hoas.

(bis)

Ar Martolod, o cuitad e vestres

Neuse eta plac'h yaouane traïtour
E c'han da bartia var an dour,
En lec'h ma vin rusquellez,
Tolet a distolet,
Ne laquin quen va speret,
Da zongeal er merc'het.

(bis)

AVIS

Me o ped martolodet yaouanc
Oh, né laquit quet o zantimant,
Da zongeal n'ho mestrezet,
Gant re a garante,
Pe el vedon vefet tromplet,
Ag o po queus goude.

(bis)

FIN**DISPUT NEVEZ ENTRE YAN A JANNET DIVAR BEN A DEMEI***(Var eun ton' joaüs.)*

Me o ped oll bretonet, da selaou eun disput,
A laquaio da c'hoarsin, eun nomb bras d'eus a dud
Savet re Yan a Jannet, var ar brieles,
O daou e oant contant bras, da antren evruries.

Yan

Arça eta Jeannedic, cetu deut molarge,
Gommanço an dud yaouanc da vale adare,
Mes me oa goelloc'h gamen, ma queret consanti.
Ni mijem bet coseet, var sujet demezi.

Jannet

O ya da eme Jannet, me zo contant a ze,
Me so scuis o servicha, me c'houl va liberte,
Ag a zimeo dec'h Yan, gant joa vrás em c'halon,
Pa gerfet c'hemp assambles, beteg ti ar person.

Yan

Mes arog commanç netra vo red mad demp goelez,
Penos formi or menag, intended mad Jannet,
Pa c'her briedeles, ve eur scoulm da ober,
Ag an ini capapla n'hel quet en disozer.

Jannet

Oh ya reson a p'eut Yan red ma vo demp goelet,
Penos e qerso an traon, goude vemp demeet,
C'houi c'haio da zevega, po deg guennec bemde,
A me a mo seis pe eis ive deus va c'hoste.

Yan

Oh, neuse avad Jannet, ma ve gouir quement-se,
Ni zestimo cals arc'hant da laquat a goste,
Mes pelec'h chafemp da chomp larit din Jannet,
Rag o clasqt logement, e vefomp goel nebet.

Jannet

O c'houi so diod Yannic, a nouzoc'h quet erfad,
Enti Vari C'hlasiou, tostic da di va zad,
Eno var eur roc'het vrás neur variqen didal,
Me a gred penos Yannic eno vefomp quet fall.

Yan

Oh, eur variqen didal, penos e vo placet,
Penos e chomo eno, ma na ve quet staguet,
Rag pa raio avel grenv, vemp tolet ac'hane,
D'an traon divar ar roc'hel, e colfomp om bue.

Jannet

O ya staguet mad e vo, gant eur varen houarn,
A d'eus an tu vo n'havel, ni droi gant om daouarn,
Mes lavarit d'in Yannic pelec'h vo roed monet,
Evid clask ar goaliguer, aben de an eured.

Yan

Va se eta Jannedic, en em dransportet quet,
Me choaso dec'h eur oalen, aben de oc'h eured,
Na vo quet en diamant, en arc'hant n'ag en aour,
Rag a reze n'in quet mad, vid eurusji ar paour.

Me ielo ganec'h Jannet, da di eur panerer,
Ennes a n'eus bar ne di, danv cals goaliguer,
A reio gred gand ozill, casi en liou d'an aour,
Goaligner deus a sort-se, Jannet, so vit ar paour.

Jannet

Evideomp mar demean, ranquin bea cleriet,
Bars an aour pe en arc'hant, rog ma vin eureujet,
A non pas deus goaliguer, gret gant tamou ozill,
Ententit ervad Yannic, me mo quet a draou vil.

Yan

Ya rëson apeut Jeannet, vit an ini elle cat,
Eur oalen aour pe arc'hant, certen so eun dra vad,
Goude vefet demeet, petra rai ar rese,
Var o pis met a sicour da frita paourente.

Neuse vo rëd o goëza, evit cat un tam boët,
Un anter just neubeutech, evit pa oan prenet,
Mes larit din c'hoas Jannet, mar or be bugale,
Da belec'h vo red demd mont vit clask haniou d'he.

Jannet

Tavit var se choas Yannic, abred ma om da ze,
Aben neuse vo er vro, cals anoiou neve,
A ma na vent quet et tout, neuse ni a choaso,
Anoiou d'ar bugale, ar c'haera vo er vro.

Yan

Mes breman pa m'eump comzet, un tam ve or stadou,
E vamp d'emp en em glevet ize var or madou,
Rag me paour ques Jannedic, a so goell baour breman,
Na meus evit mobilier, nemet neubet a dra.

M'eus met un anter goele roet din gant va man,
Dillat da laquat varn'han, sioas choas ne m'eus tam.
Besseliou d'ober ar boed vo red demp cat ive,
Rag me ne meus netra tout, demeus a gement se.

Jannet

Oh, Yannic va mignon ger, m'ho pet n'em genet quet,
Rag besseliou d'ober boed, dec'hui ne vanco quet,
Rac eno var ar roc'hel, formin eur choudouren,
A vo mad d'emp d'ober iod, a da ober souben.

Laoiou a gafomp ive, a na vont get goel ger
Gont tamou coat ni raio, pa m'omp un tam amzer,
Erfin an traou tout a vo accomod evidomp,
Nemet da gerc'hat an dour, ne on pelec'h chefomp.

Yan

An dour avaq Jannedic, me bromet yanco quet,
Cals esetoc'h vit bara, d'ec'h a vo pourveet,
Me raio un foul er roc'h a chomo dour ennan,
Qercouls en creis an domder, vel en creis ar gouan.

Jannet

Oh, choui so un den Yannic, n'eus quet oell evidoc'h,
A pa renfet tro ar bed, ne gafen nemet oc'h,
Ave quen ezet a c'houi, cavet d'ober on tan,
Mes var sujet om euret, coseomp ta breman.

Yan

Me ne mo bet cals a dud, evit va assita,
A c'hoas a peç a deuio, ne refont quet cals tra,
Ma na gossont quet gante, bars en o godellou,
Me a bromet d'ec'h Jannet vo bian o fronfour.

Jannet

Goel baour e so e ligne, evel ma lavarit,
Ag a re deus va c'hoste, von quet ive pinvig,
Me lavarde un dra dec'h Yannic mad a gafen,
E vefe gred om eured, ep lavaret da zen.

Yan

Oh reson a peut Jannet, o laret quement se,
Neuze c'homfe tout ganemp, mar qeromp ober se,
Ma na memp quet a brofit, coll na nomp quet ive,
Lezomp pehini c'hanom, e famill agoste.

Jannet

Allon ta ma Yannic, demp da di ar person,
A ni deut da finissa, evelise om chanson,
N'eur ober peç meump laret, bea fidél goude,
Ag e vefomp evurus, beteg fin or bue.

Neuze nomp plijadur vrás, o veva assembles,
Bar en em lochen neve, betec fin or bue,
Eno pell deus a bartout, ni ello contempn,
An douar ag an envou, a donet d'emeuli.



GUERZ FANCHIQ MA MIGNON

Var ton : Va Flaneden zo Caled.

Tostait o tud yaouanc, ha quemerit true
Ouz ar blanedenn bonner aboes var va bues
Deut da guemesq hoteleou assemblees gant varé
Da soulagi va foanniu deut da voela varne.

Cetu deg vloas tremenet ma zon bet contraignet
D'abandonni, va c'herent, va douç va mignonet,
Evit monet d'ar brezel da zougouen an armo,
E faveur al liberte voa prometeet d'am bro.

A boue quet allamzer n'alfen quet lavaret,
Pet combat a poanniu ameus me anduret,
Tri c'chant leo am separe eus va c'herent nessa
Ha na meus bet diouto quelou andistera

E creis ar c'harnach bemde va bries exposet
Unan demeus va diou vrec'h er fin a meus collet,
Hac evit oll recompanç emeus bet va c'honeje,
Hep receo nep pansion da veva em c'ontre.

C'hoas laouen o tilen el servich ar Republic,
N'en deo quet deut va speret da gomprent er fatiq
Eus an en hir ha poanieus am boa me da pler,
Aroc quelet va zud quer hac erru out er guer.

Collet emeus ar gallout da rei sicour d'am zad,
Hac o tivoeret va brec'h, n'allin mui labourat,
Brema va zud an mago, pa meus me c'hoas ar chanç
Mo deus leve ha arc'hant ebars en abundanç.

Cetu me dija erru tostic demeus ar guer.
Gant ar joa ous va quelet an oll a rey din cher,
Va zad, va mam, va c'herent, breudeur, ar c'hoareset
Ha va mestresic fidet a vo oll ravisset.

Bonjour dec'h o va c'ontre ; eurus en em garan,
Gallout c'hoas o contemplit : dont da verval aman,
Va c'halon gant ar joa vrás em c'hereis so seriet,
O tostad demeus an ty e lec'h mont bet ganet.

Mes oc'h antreal enni, e zont bet trubuillet,
Un den di anar din me e deus din lavaret,
Eru e fall oc'h aman, sortiet va mignon,
Ne ma quet ar mestr ergier n'ho po quet alusen.

Soueset bras o velet n'an aveyen hini
Toues quen lies personnac'h a voa o ren en ty,
Emeus me prest responset : ententin va reson,
Me n'em don quet ama da glasq an alusen.

Clasqa ran va c'herent quer er plaç mont bet gane
Al lec'h ma zodeo aman on bet maguet,
Lavarit din, me o ped, pelec'h eno c'havrin.
Ne zelot netra qen din evit va c'ontantin.

An den ma a so follet int commandet et crial,
N'en de qet mab d'hor mest ni ret eo ar hasseal,
Guelet a pije neuse eur vanden mevellin,
O tiredec gant bezier d'am c'hasseal souden.

O sortial gant glac'h ar ha beus et em daelou,
Da glasq va zud elec'h all pe clevet o c'helou,
En hent e son bet scoet vel gant eun tol curun,
Pa meus me an aveet voa collet hor fortun.

Souden o meus rancontret va c'hoar ar yaouanqa,
Eur zac'hic staguet outi, o c'houlen et bara,
O clasq compren ar malheur var n'ompni digueret,
Va speret so bet troublet ha va c'halon manret.

O Doue oll buissant roit din hoc'h assistanç,
Roit din an ners da glevet penos ho Providanç,
E deveus bet permettet, evit ma c'hestia,
Ma zomponi bet reduiset er stad an herrupla.

Va c'hoaric paour, me o ped, soulagit va miser,
Hast bras a neuse da glevet qelou deus va sad quer ;

Hac eus ar vamic tener edeveus hor savet,
Mervel a ran en defot o zerc'hel embrasset.

Siouas dit, va breuric paour, ne oufes quet compren
Peguen bras eo hor malheur, paguer bras hon a quen,
Allas, ouspen hor madou, redomp divueret
Hor c'herent carantzeus so bet deom pravistet.

En despet dal lezennou gret gan ar Republiq,
Hon tad voa chomet fidet dan ilis catholiq,
Rec se gant an tyranet es eo bet condaonet,
Da bignat var ar chaffot vit besa dibennet,

Prestic goude hor madou so bet confisquet,
Hac ive, prestic goude siouas int bet guerzet,
Consumet gant ar chagrin deus quement agollo
Hor maman a so bet neuse scoet gant ar maro.

Cessit va oar da barlant cessit dam desoli,
Re a meus var an douar adourmant ac ennu,
Eur moment ma c'hesperen commenç beva eus eur,
En em garvan oa Doue miuyoc'h my malheureus.

Goude besa servichet ar Republiq ingrat,
E deus dam recompansi guillotinet va zad,
Laquet va mam da verval dre uers an disesper,
Ha guerset va oll vadou nem bonovet miser.

Dious an tourmanchou garo astourmous va speret,
Pelec'h caout soulajement pelec'h cavet remed,
Ar plac'h e deus captivet a bel va santiment,
A soulajo va hirvoud gant e c'homzou charmant.

Var zudy va mestresic ezan gant esperanç
Caout en e fidelite remed eus va souffranc,
Bonjour denc'h va rouanes cetu me deut er vro,
Ancouet eo va oll boanniou, mar am c'harit atao.

Mezo Fanchic he mignon distro eus ar brezel
Hac a so en pebemser chommet et dechu fidet.
Demeus va oll garentes ebars en horc'h endret,
E meus brema esperanç besa recompanceet.

Petra paourques renzen diclasqit-u en em c'hever,
Biscoas nemeus o quelet na desiret ober.
Biscoas nemeus o caret no birviouen n'ar gran,
Ha ceta en ber gomsou o setenç divesa.

Me so un den malheurus, ne gafet quet ebar,
Mil guel miliguet an eur mondeut var an douar,
Oll goulliou va c'halon se neve digoret,
O vesa bed rebutet gant va mya caret.

Va mestres ous va quelet coues et en paourente,
Nijet et fromes saou nijet a c'harante,
Esperanç va eurusted allas so tremenet,
Evet ma ra ure en nos dre hor speret.

An exempl ma tud yaouanc a deu doc'h instrui,
Peguen dister ar bed maleun a ingrateri,
Epad ma zoc'h pinvidic gant an oll oc'h caret,
Mes mar trod roud ar fortun adieu ar mignonet.

Petra ran var an douar collet var mam va zad,
Va mestres hava madou va brec'h da labourat,
O verval pe o veva er c'hoad gant al loëned
Rin guell eguet implori ama faus mignonet.

Er c'hoajou ante ialla otont den en guzat
Maguet vingant va glac'h ar hac eus va daoulagat,
E tire do an daelou da denc'h va zec'hed,
Beted ar moment eurus ma quittainur bed.

En despet d'an injustiç a eprouvan hirio,
Me bedeo agreiz calon evit bonheur va bro,
O va doue deurvezit renta, dre ho puissanç
Ar bonheur al liberte d'am bro gues eus a Franc.